

STATUDOÙ STATUTS

E brezhoneg hag e galleg eo skrivet ar statudoù-mañ.
Les présents statuts sont rédigés en breton et en français.

/ TITL 1 : ANVIDIGEZH – PALIOÙ – AOZADUR DIABARZH / / TITRE 1 : DÉNOMINATION – BUTS – COMPOSITION /

MELLAD KENTAÑ – Anv

Gant an izili hag ezelezed diazezerien ez eus krouet, dre ar statudoù-mañ, ur gevredigezh diouzh lezenn ar 1^{añ} a viz Gouere 1901 ha dekred ar 16 a viz Eost 1901 hag a zo BREZHONEG E BRO ROUZIG hec'h anv.

MELLAD 2 – Pal

Pal ar gevredigezh eo diorren, talvoudekaat, difenn ha treuzkas glad ha sevenadur Breizh ha dreist-holl ar brezhoneg.

MELLAD 3 – Tiriad

Gouestlet e vez obererezhioù ar gevredigezh kentoc'h e Bro Rouzig, da lavarout eo an tiriad hengounel ma'z a ar c'humunioù-mañ eus Penn-ar-Bed d'ober anezhañ : Argol, Dineol, ar Faou, Gouezeg, Kastellin, Landevenneg, Lopereg, Lotei, Pont-ar-Veuzenn-Kimerc'h, Meilh-ar-Wern, Rosloc'hen, Sant-Kouled, Sant-Riwal, Sant-Segal ha Tregarvan. En em aotreañ a ra ar gevredigezh da gas hec'h oberiantiz e kement lec'h all ma soñj dezhi ez eo talvoudus.

MELLAD 4 – Savlec'hiañ

Doujus eo ar gevredigezh ouzh tuioù politikel pe relijiel pep hini hag en em virout a ra da gemer perzh e nikun anezho.

ARTICLE PREMIER – Nom

Il est fondé entre les adhérent.e.s aux présents statuts une association régie par la loi du 1er juillet 1901 et le décret du 16 août 1901, ayant pour titre : BREZHONEG E BRO ROUZIG.

ARTICLE 2 – Objet

L'association a pour objet le développement, la promotion, la défense et la transmission du patrimoine et de la culture bretonne et en particulier de la langue bretonne.

ARTICLE 3 – Territoire

Le territoire privilégié par l'association pour y développer ses activités est le Pays Rouzig, c'est-à-dire l'ensemble traditionnel formé des communes suivantes du département du Finistère : Argol, Châteaulin, Dinéault, Le Faou, Gouezec, Landévennec, Lopérec, Lothey, Pont-de-Buis-lès-Quimerc'h, Port-Launay, Rosnoën, Saint-Coulitz, Saint-Rivoal, Saint-Ségal et Tregarvan. L'association se réserve la possibilité d'agir en tout autre lieu si elle le juge nécessaire.

ARTICLE 4 – Positionnement

L'association est respectueuse des convictions personnelles de chacun et s'interdit toute attache avec un parti politique ou une confession.

MELLAD 5 – Sez sokial

Diazezet eo sez sokial ar gevredigezh er chomlec'h amañ da heul :

2 ru Ti Jopig, 29590 Pont-ar-Veuzenn-Kimerc'h

Gallout a ra ar chomlec'h-mañ bezañ kemmet diwar diviz ar bodad-stur ha kelaouet e vo ar vodadeg-veur.

MELLAD 6 – Padelezh

Didermen eo padelezh ar gevredigezh.

MELLAD 7 – Izili hag ezelezed

Izili hag ezelezed ar gevredigezh eo an hiniennoù a sav a-du gant ar statudoù-mañ, hag a bae ar skodenn vloaziek a vez divizet he sammad gant ar vodadeg-veur.

MELLAD 8 – Diemezelañ

N'eo ket ezel.ez ken an hini :

- a) a ro h.e d.zilez ;
- b) ne bae ket h.e skodenn en-dro ;
- ch) a vez ezrollet diwar un abeg grevus hag a noazh lazioù ar gevredigezh. Kement-mañ a vez disklêriet gant ar vodadeg-veur diwar kinnig ar bodad-stur, an hini e kaoz o vezañ bet roet an dro dezhañ pe dezhi d'en em zifenn dirak ar bodad stur ;
- c'h) aet d'an Anaon.

MELLAD 9 – Peadra ar gevredigezh

Dont a ra peadra ar gevredigezh eus :

- a) skodennoù an izili hag an ezelezed ;
- b) roadoù a-zorn-da-zorn ;
- ch) skoaziadoù foran pe brevez ;
- c'h) ar gwerzhañ produioù, servijoù, obererezhioù (purchaset gant ar gevredigezh) da-geñver hec'h oberiantizoù ha diouzh he statudoù. ;
- d) koulzadoù arc'hantaouiñ a-stroll ;
- e) kement all a zo ha n'eo berzhet gant al lezenn hag ar reolennadurioù e talvoud.

ARTICLE 5 – Siège social

Le siège social de l'association est fixé à l'adresse suivante :

2 rue de Ti Jopic, 29590 Pont-de-Buis-lès-Quimerc'h

Il pourra être transféré en tout autre lieu par décision du comité directeur et l'assemblée générale en sera informée.

ARTICLE 6 – Durée

La durée de l'association est illimitée.

ARTICLE 7 – Membres

Sont membres de l'association les personnes physiques qui adhèrent aux présents statuts et acquittent la cotisation annuelle dont le montant est fixé par l'assemblée générale.

ARTICLE 8 – Radiation des membres

La qualité de membre se perd par :

- a) démission ;
- b) non renouvellement de la cotisation ;
- c) radiation pour motifs graves portant préjudice aux intérêts de l'association. Cette dernière est prononcée par l'assemblée générale sur proposition du comité directeur, l'intéressé.e ayant été invité.e à faire valoir ses droits à la défense auprès du comité directeur ;
- d) décès.

ARTICLE 9 – Ressources

Les ressources de l'association sont constituées :

- a) des cotisations de membres ;
- b) de dons manuels ;
- c) de subventions publiques ou privées ;
- d) de la vente de produits, de services ou de prestations (fournis par l'association) dans le cadre de ses activités et conformément à ses statuts ;
- e) d'opérations de financement participatif ;
- f) de toute autre ressource qui n'est pas interdite par la loi et les réglementations en vigueur.



/ TITL 2 : AR VODADEG-VEUR / **/ TITRE 2 : L'ASSEMBLÉE GÉNÉRALE /**

MELLAD 10 – Reolennoù diazez

Termeniñ, reteriñ ha kontroliñ a ra ar vodadeg-veur politikerezh hollek ar gevredigezh.

Holl izili hag ezelezed ar gevredigezh az a d'ober ar vodadeg-veur.

Ordinal pe dreist-ordinal e c'hall ar vodadeg-veur bezañ.

Treuzkaset e vez (ken)galv ar vodadeg-veur d'an izili hag ezelezed pemzektez d'an nebeutañ a-raok an deziad lakaet. Kaset e vez dre skrid ar (c'hen)galvoù, enno ar roll-labour. Ma vez eus pezhioù stag talvoudus evit ar c'hendivizoù e vezont kaset d'an izili hag ezelezed eizh eurvezh ha daou-ugent d'an diwezhatañ kent devezh ar vodadeg-veur.

Renet e vez ar vodadeg-veur gant ar b.prezidant.ez.

Gallout a ra votiñ an izili hag ezelezed oadet a 18 vloaz tremenet da zevezh ar vodadeg-veur ordinal. Divizoù ar vodadeg-veur a vez kemeret gant ar muiañ-niver a vouezhioù talvoudek a-berzh an izili hag ezelezed bezant.

Ur vouezh hepken a zalc'h pep ezel.ez. Ne c'hall an divizoù talvezout nemet war ar c'hrafoù hag a zo war ar roll-labour bet kaset d'an izili hag ezelezed da geñver ar (c'hen)galv. Aotreet eo mouezhiañ dre c'halloudegadur dre skrid, gant ma chom en tu-mañ d'ur galloudegadur dre ezel.ez v.bezant da vare ar vouezhiadeg. Ur vouezhiadeg all a vez kaset en degouezh ma vez kevatal an disoc'h. Ma chom kevatal an disoc'h adarre e vez disrannet ar vouezhiadeg gant mouezh ezel.ez ar bodad stur eo e renk an uhelañ diouzh an urzh-kentelezh menneget er mellad 13. Rankout a ra ar mouezhiañ-mañ bezañ talvoudek (ne c'hall ket an den-mañ na chom hep mouezhiañ, na mouezhiañ gwenn na null).

Dre ziouer e vez mouezhiet en ur sevel an dorn.

Ur vouezhiadeg dre vilhedoù-kuzh a vez kaset :

a) diwar diviz ar b.prezidant.ez ;

b) ma vez mouezhiet en a-raok en abeg da se gant muiañ-niver absolut an izili hag ezelezed bezant. N'he deus ket ar rak-vouezhiadeg-mañ

ARTICLE 10 – Dispositions générales

L'assemblée générale définit, oriente et contrôle la politique générale de l'association.

L'assemblée générale comprend tou.te.s les membres de l'association.

L'assemblée générale peut être ordinaire ou extraordinaire.

Les convocations de l'assemblée générale sont transmises aux membres au moins quinze jours avant la date fixée. Les convocations, écrites, comprennent l'ordre du jour. Les éventuelles pièces annexes nécessaires au débat sont tenues à disposition des membres, au plus tard quarante-huit heures avant le jour de l'assemblée générale.

Le.La président.e préside l'assemblée générale.

Sont électeur.trice.s les membres de l'association âgé.e.s de 18 ans révolus à la date de l'assemblée générale ordinaire. Les décisions de l'assemblée générale sont prises à la majorité des suffrages exprimés des membres présent.e.s.

Chaque membre dispose d'une seule voix. Les décisions ne sont valables que sur les points figurant à l'ordre du jour transmis aux membres lors de leur convocation. Le vote par procuration écrite est autorisé, dans la limite d'une procuration par membre présent.e au moment du vote. Il est procédé à un nouveau scrutin en cas de partage des voix. Si le partage subsiste après ce nouveau scrutin, la voix du.de la membre du comité directeur dont le rang est le plus important dans l'ordre de préséance précisé à l'article 13 est prépondérante. Ce suffrage doit obligatoirement être valablement exprimé dans ce cas de figure (cette personne ne peut ni s'abstenir, ni voter blanc ou nul).

La règle générale est de conduire les scrutins à main levée.

Un scrutin a lieu à bulletins secrets :

a) sur décision du.de la président.e ;

b) en cas de vote préalable en ce sens de la majorité absolue des membres présent.e.s. Ce vote préalable n'a pas à apparaître à l'ordre du jour communiqué en amont de l'assemblée générale pour être valable ;

da vezañ menneget er roll-labour kent ar vodadeg-veur evit bezañ talvoudek ;
ch) evit dilenn izili hag ezelezed ar bodad stur.

Talvezout a ra an divizoù kemeret gant ar vodadeg-veur evit an holl izili hag ezelezed.

MELLAD 11 – Bodadeg-veur ordinal

Aozet e vez ar vodadeg-veur ur wezh bep bloavezh keodedel.

Gant ar bodad-stur e vez savet he roll-labour, o terc'hel kont, ma vez, eus an evezhiadennoù ha kinnigoù bet kaset a-raok ar c'hengalv gant unan pe meur a ezel.ez eus ar gevredigezh.

Kaset e vez ar roll-labour gant ar b.prezidant.ez ha rankout a ra embarzhiñ d'an nebeutañ :

a) un danevell vuhezel hag ur rentañ-kont eus oberiantiz ar gevredigezh gant ar b.prezidant.ez, skoazellet gant izili hag ezelezed ar bodad-stur ;

b) un danevell gant an d.teñzorour.ez eus merañ an arc'hant ha kontoù ar bloaz (bilañs, kont disoc'h ha stagadennoù, niver a izili hag ezelezed, peurgetket) ;

ch) priz ar skodenn vloaziek.

Mouezhiañ a ra ar vodadeg-veur war ar c'hrafoù-mañ.

MELLAD 12 – Bodadeg-veur dreist-ordinal

Dalc'het e vez ar vodadeg-veur dreist-ordinal :

a) diwar c'houlenn ha war-ziazez ur roll-labour bet aozet gant unan pe meur a ezel.ez eus ar bodad-stur ;

b) diwar intrudu ur c'hard eus izili ar gevredigezh d'an nebeutañ. En degouezh-mañ e vez aozet ar roll-labour gant ar c'hrafoù o kenglotañ a fell d'an izili hag ezelezed a sell outo lakaat e-barzh ar roll-labour. An niver rekis a izili hag ezelezed a vez kavet e-barzh rentañ-kont bloaziek diwezhañ an d.teñzorour.ez.

Kaset e vez ar c'hengalvoù da izili hag ezelezed ar gevredigezh pemzek devezh en a-raok, da heul unan eus an daou zegouezh-se d'an nebeutañ

c) pour l'élection des membres du comité directeur.

Les décisions de l'assemblée générale s'imposent à tou.te.s les membres.

ARTICLE 11 – Assemblée générale ordinaire

L'assemblée générale ordinaire se réunit une fois par année civile.

Son ordre du jour est établi par le comité directeur, en tenant compte des éventuelles remarques et suggestions proposées en amont de la convocation par un.e ou plusieurs membres de l'association.

L'ordre du jour est transmis par le.la président.e et prévoit nécessairement au moins :

a) un exposé de la situation morale et un compte-rendu de l'activité de l'association par le.la président.e, assisté.e des membres du comité directeur ;

b) un rapport par le.la trésorier.ère de sa gestion et des comptes annuels (bilan, compte de résultat et annexes, nombre de membres, notamment) ;

c) la fixation du montant des cotisations annuelles.

Ces points font l'objet d'un vote de l'assemblée générale.

ARTICLE 12 – Assemblée générale extraordinaire

L'assemblée générale extraordinaire se réunit :

a) à la demande et sur la base d'un ordre du jour établi par un.e ou plusieurs membres du comité directeur ;

b) à l'initiative du quart au moins des membres de l'association. Dans ce cas l'ordre du jour est assorti des points concordants que les membres concerné.e.s souhaitent porter à l'ordre du jour. La base considérée pour le nombre de membres de l'association est celle figurant au dernier rapport annuel du.de la trésorier.ère.

Les convocations sont adressées aux membres de l'association dans un délai n'excédant pas quinze jours suivant la réalisation d'au moins une de ces conditions.



/ TITL 3 : AR BODAD-STUR /
/ TITRE 3 : LE COMITÉ DIRECTEUR /

MELLAD 13 – Aozadur ar bodad-stur

Aozet e vez mont en-dro ar gevredigezh gant ar bodad-stur ha kemer a ra e karg he merañ. E-barzh ar bodad-stur ez eus, diouzh an urzh-kentelezh amañ da heul :

- 1) ur b.prezidant.ez ;
- 2) ur v.bez-prezidant.ez ;
- 3) un d.teñzorour.ez ;
- 4) ur v.bez-teñzorour.ez.

Ne c'hall pep hini kaout nemet unan eus ar c'hargoù-mañ.

Dilennet e vez izili hag ezelezed ar bodad-stur gant ar vodadeg-veur evit daou vloavezh. Gallout a reont bezañ dilennet meur a wezh.

MELLAD 14 – Ezrollañ unan eus izili pe ezelezed ar bodad-stur.

Ur vodadeg-veur dreist-ordinal a c'haller gervel evit termeniñ ezrolladur unan eus izili pe ezeled ar bodad-stur diwar un abeg grevus hag a noazh lazioù ar gevredigezh. Gant ar vodadeg-veur dreist-ordinal e vez statutet war gement-mañ, an hini e kaoz o vezañ bet roet an dro dezhañ pe dezhi d'en em zifenn dirak ar bodad stur.

MELLAD 15 – Emvodoù ar bodad-stur

Galvet e vez ar bodad-stur gant an ezel.ez emañ h.e urzh-kentelezh an uhelañ pe a-gevred gant daou ezel.ez d'an nebeutañ. Kaset e vez ar c'hengalv dre gement doare a zere evit ma vo resevet mat gant pep ezel.ez ar bodad.

Ne c'hall ar bodad-stur en em vodañ en ur doare talvoudus nemet ma vez bezant an hanter eus e izili hag ezelezed d'an nebeutañ. Ma ne vez ket tizhet ar c'horom e vez galvet ar bodad-stur evit aozañ un emvod all, hag a rank en em zerc'hel a-benn eizh devezh d'an nebeutañ ha pemzek devezh d'ar muiañ ; gallout a ra neuze kuzuliañ ez-talvoudek, forzh pegement a izili hag ezelezed a vefe. En un abeg trumm e c'hall ar geit-se diskenn da dri devezh.

Divizoù ar bodad-stur a vez kemeret gant muiañ-niver ar mouezhiañ gant an izili hag ezelezed bezant. Ma vez kevatal an niver a vouezhioù e

ARTICLE 13 – Composition du comité directeur

Le comité directeur règle la marche de l'association et a la charge de la gestion quotidienne de l'association. Le comité directeur est constitué, dans l'ordre de préséance suivant:

- 1) d'un.e président.e ;
- 2) d'un.e vice-président.e ;
- 3) d'un.e trésorier.ère ;
- 4) d'un.e trésorier.ère adjoint.e.

Une même personne ne peut être élue pour plus d'une de ces fonctions.

Les membres du comité directeur sont élu.e.s pour deux années par l'assemblée générale. Elles et ils sont rééligibles.

ARTICLE 14 – Révocation d'un membre du comité directeur

Une assemblée générale extraordinaire peut statuer sur la révocation d'un.e membre du comité directeur pour motifs graves portant préjudice aux intérêts de l'association. Cette dernière est prononcée par l'assemblée générale extraordinaire, l'intéressé.e ayant été invité.e à faire valoir ses droits à la défense auprès du comité directeur ;

ARTICLE 15 – Réunions du comité directeur

Le comité directeur est convoqué par son.sa membre dont le rang de préséance est le plus élevé ou de manière conjointe par au moins deux de ses membres. La convocation est transmise par tout moyen garantissant sa réception par chaque membre du comité.

Le comité directeur ne peut se réunir valablement que si au moins la moitié de ses membres sont présents. Si ce quorum n'est pas atteint, le comité directeur est convoqué en vue d'une nouvelle réunion, qui doit se tenir dans un délai minimum de huit jours et maximum de quinze jours ; il délibère alors valablement, quel que soit le nombre des membres présents. En cas d'urgence, ce délai peut être réduit à trois jours.

Les décisions du comité directeur sont prises à la majorité des suffrages exprimés des membres

pouezo muioc'h hini an ezel.ez uhelañ h.e urzh-kentelezh.

Kement ezel.ez ar bodad-stur a vo c'hwitet tri emvod diouzh renk gantañ pe ganti ha vo brudet dilezer.ez.

MELLAD 16 – Dileuriañ galloudoù

Gallout a ra ar bodad-stur dileuriañ ar galloud-mañ-galloud, en un doare termenet, da unan pe meur a ezel.ez

MELLAD 17 – Ar b.prezidant.ez

Gant ar b.prezidant.ez pe kement ezel.ez all ar bodad-stur leuret a-ratozh e vez derc'houezet ar gevredigezh dirak al lez-varn hag e kement akta ar vuhez keodedel.

MELLAD 18 – Vakted e diabarzh ar bodad-stur

En degouezh ma vefe vak unan pe zaou eus kargoù ar bodad stur e vez galvet ur vodadeg-veur dreist-ordinal gant an ezel.ez an uhelañ h.e urzh-kentelezh e touez an ezel.ez.ed pe izili a chom er bodad-stur, en ur zoujañ ouzh an termen raktreset e mellad 12 ar statudoù-mañ. Embarzhiñ a ra an urzh-labour bet kaset da izili hag ezelezed ar vodadeg-veur krafoù e liamm gant ar mouezhiañ(où) oc'h aotren da glokaat ar bodad-stur. Respedoù an dud dilennet er mod-mañ a echu en deiziad m'o dije ranket kavout respedoù an izili pe ezelezed bet erlec'hiet o zermen. En degouezh ma chom vak ar brezidantelezh e vez fiziet an etrekarg d'an ezel.ez an uhelañ h.e urzh-kentelezh e-touez izili hag ezelezed ar bodad-stur, betek ma vefe dilennet ur b.prezidant.ez nevez.

Ma chom vak holl gargoù ar bodad-stur e c'hall ar c'hard eus izili hag ezelezed ar gevredigezh d'an nebeutañ gervel ar vodadeg-veur. Ar reketerien.ezed a rank kas dre gement doare a zere kas ar c'hengalv da holl izili hag ezelezed ar gevredigezh. An niver rekis a izili hag ezelezed a vez kavet e-barzh rentañ-kont bloaziek diwezhañ an d.teñzorour.ez. En degouezh-mañ e vez renet ar vodadeg-veur gant hini henañ an izili hag ezelezed bezant.

présent.e.s. En cas de partage des voix, celle du.de la membre dont le rang est le plus important dans l'ordre de préséance est prépondérante.

Tout.e membre du comité directeur qui, sans excuse écrite, n'aura pas assisté à trois réunions consécutives sera considéré.e démissionnaire.

ARTICLE 16 – Délégations de pouvoirs

Le comité directeur peut déléguer tel ou tel de ses pouvoirs, pour une durée déterminée, à un.e ou plusieurs de ses membres.

ARTICLE 17 – Le.La président.e

L'association est représentée en justice ainsi que dans tous les actes de la vie civile par son.sa président.e ou tout autre membre du comité directeur dûment mandaté.e à cet effet.

ARTICLE 18 – Vacances au sein du comité directeur

En cas de vacance d'une ou deux des fonctions du comité directeur, une assemblée générale extraordinaire est convoquée par le.la membre dont le rang est le plus important dans l'ordre de préséance parmi le.la(les) membre(s) restant.e(s) du comité directeur, en respectant le délai prévu à l'article 12 des présents statuts. L'ordre du jour communiqué aux membres de l'assemblée générale comporte alors des points relatifs au(x) scrutin(s) permettant de compléter le comité directeur. Les mandats des personnes ainsi élues prennent fin à la date où devaient normalement expirer les mandats des membres remplacé.e.s. Dans le cas où la présidence est vacante, son intérim est assuré, jusqu'à l'élection d'un.e nouveau.elle président.e, par le.la membre dont le rang est le plus important dans l'ordre de préséance parmi le.la(les) membre(s) restant.e(s) du comité directeur.

En cas de vacance de l'ensemble des membres du comité directeur, le quart au moins des membres de l'association peut convoquer l'assemblée générale. Les requérant.e.s doivent s'assurer, par tout moyen utile, de communiquer la convocation à l'ensemble des membres de l'association. La base considérée pour le nombre de membres de l'association est celle figurant au dernier rapport annuel du.de la trésorier.ère. Dans ce cas de figure, le.la doyen.ne d'âge des membres présent.e.s préside la séance de l'assemblée générale.

/ TITL 4 : MELESTRADUREZH DIABARZH /
/ TITRE 4 : ADMINISTRATION INTERNE /

MELLAD 19 – Gopr

An holl gargoù, ha re ar bodad stur zoken, zo digoust hag a youl vat. Ne vez restaolet, diwar desteni, nemet ar frejoù bet paeet evit kas ar c'hargoù-mañ da benn. Danevell an arc'hant, kinniget d'ar vodadeg-veur ordinal, a ziskouez dre hinienn ar restaoladennoù evit frejoù kefridioù, frejoù hent pe derc'houezañ.

MELLAD 20 – Yezh kehentiñ diabarzh ar gevredigezh

Er c'hendivizoù skrivet pe gomzet a denn da vuhez ha mont en-dro diabarzh ar gevredigezh e vo priorizet implij ar brezhoneg.

MELLAD 21 – Reoliadur diabarzh

Gallout a ra ur reoliadur diabarzh bezañ savet gant ar bodad-stur a laka ar vodadeg-veur d'e asantiñ.

An danvez reoliadur-mañ a servij da dermeniñ ar c'hrafoù a bep seurt ha n'int ket bet raktreset gant ar statudoù-mañ, ar re e liamm gant melestradurezh diabarzh ar gevredigezh peurgetket.

ARTICLE 19 – Indemnités

Toutes les fonctions, y compris celles de membres du comité directeur, sont gratuites et bénévoles. Seuls les frais occasionnés par l'accomplissement de ces fonctions sont remboursés sur justificatifs. Le rapport financier présenté à l'assemblée générale ordinaire présente, par bénéficiaire, les remboursements de frais de mission, de déplacement ou de représentation.

ARTICLE 20 – Langue de communication interne

Dans les échanges écrits ou oraux relatifs à la vie et au fonctionnement interne de l'association, il sera donné priorité à l'emploi de la langue bretonne.

ARTICLE 21 – Règlement intérieur

Un règlement intérieur peut être établi par le comité directeur, qui le fait approuver par l'assemblée générale.

Ce règlement éventuel est destiné à fixer les divers points non prévus par les présents statuts, notamment ceux qui ont trait à l'administration interne de l'association.



/ TITL 5 : KEMM AR STATUDOÙ, DIVODANÑ /
/ TITRE 5 : MODIFICATION DES STATUTS, DISSOLUTION /

MELLAD 22 – KEMM ar statudoù

Diwar kinnig ar bodad-stur pe ur c'hard d'an nebeutañ eus izili hag ezelezed ar gevredigezh e c'hall ar statudoù bezañ kemmet e degouezh hag aozadur ar vodadeg-veur dreist-ordinal.

MELLAD 23 – Divodañ

Ar vodadeg-veur dreist-ordinal, bet pedet da gendivizout diwar-benn divodañ ar gevredigezh ha galvet a-ratozh evit kement-mañ, a rank degemer d'an nebeutañ an hanter mui unan eus izili hag ezelezed ar gevredigezh. Ma ne vez ket tizhet an niver-se e vez galvet ar vodadeg ur wezh all, met en ur ober pemzek devezh etre an div vodadeg d'an nebeutañ hag ar wezh-se e c'hall kuzuliañ ez-talvoudek paneve niver an izili hag ezelezed bezant. E pep keñver ne c'hall an divodañ bezañ talvoudus nemet gant muiañ-niver an div drederenn eus ar mouezhioù bet roet gant an izili hag ezelezed bezant.

MELLAD 24 – Dereadur ar madoù e degouezh an divodañ

Ma vez divodet ar gevredigezh e vez roet he madoù gant ar vodadeg-veur dreist-ordinal da unan pe meur a gevredigezh hag o deus palioù heñvel outi.

ARTICLE 22 – Modification des statuts

Sur proposition du comité directeur ou du quart au moins des membres de l'association, il peut être procédé à des modifications de statuts dans le cadre et les conditions de l'assemblée générale extraordinaire.

ARTICLE 23 – Dissolution

L'assemblée générale extraordinaire, appelée à se prononcer sur la dissolution de l'association et convoquée spécialement à cet effet, doit comprendre au moins la moitié plus un des membres de l'association. Si cette proportion n'est pas atteinte, l'assemblée est convoquée de nouveaux, mais à quinze jours au moins d'intervalle et, cette fois, elle peut valablement délibérer quel que soit le nombre de membres présent.e.s. Dans tous les cas, la dissolution ne peut être prononcée qu'à la majorité des deux tiers des suffrages exprimés des membres présent.e.s.

ARTICLE 24 – Cession des biens en cas de dissolution

En cas de dissolution, l'actif net de l'association est attribué par l'assemblée générale extraordinaire à une ou plusieurs associations ou œuvres poursuivant des buts similaires.

Statudoù bet asantet gant bodadeg-veur saverez ar gevredigezh.
Statuts approuvés par l'assemblée générale constitutive de l'association.